

# MILC'HWID AR SERR-NOZ

hag un nebeut barzonegoù

gant

MAODEZ GLANNDOUR

EIL KAIER

embannet

gant

« Studi hag Ober »

1946

## KENTSKRID

*An arz a zo tra a veiz.*

*Ar Verb en Doue eo arz diabarz an Tad, komz diabarz Doue.*

*Ar Grouadelez eo e arz diavaez, komz diavaez an Tad. Met er gomz-se ez eus ur ger pennan hag a zastum ennan kement ger all, unan hag a ro ster da gement all : hennez eo ar C'hrist, ar Verb enkorfet. Evelse eo ar C'hrist a zo en un doare dreist, arz diavaez an Tad. Dioutan hag en abeg dezan eo bet krouet pep tra. En a zo pennpatrom pep krouadelez. Kompren ar Grouadelez eo kompren ar C'hrist. Hag ivez kompren ar C'hrist eo kompren ar Grouadelez. Ne c'heller ket disrannan an eil diouz egile.*

*Hag ar C'hrist a zo buhez, a zo kevre, a zo kevrin, a zo trec'h.*

*Pep arz denel a dle d'e dro en em stumman ouz arz Doue. N'heller ket kennebeut all disrannan an eil diouz egile. En ivez a dle bout buhez fetis, kevre etre an holl voudoù dishenvel, kevrin, da lavarout eo gweledigez an eneel er boudoù, kensoniez o trec'hin e-kreiz an disoniezoù pezh 'zo kened. Kredin a ran e tle arz an den bezan se, skeudennin ar Verb.*

*Kaout a ra din eo bet se arz Breiz gwechall, ha spi am eus e roio an Tad d'am Bro, trec'h awalc'h war hec'h enebourion da c'hellout her c'helenn adarre d'ar bed.*

*Evelse ur meulgan d'ar Verb a c'hell bezan un arzouriez, hag un arzouriez vrezon.*

**Luskad kentan : AR VERB A VUHEZ**

**Eil Luskad : AR VERB A LEUNDER**

**Trede Luskad : AR VERB A GEVRIN**

**Pevare Luskad : AR VERB A DREC'H**



**LUSKAD KENTAN**

**AR VERB A VUHEZ**

**Drant ha seder**

**O** santual an noz pallennet gant voulouz,  
 O neved an noz,  
 Stered ennan da c'houleier o lugernin !  
 Noz voull, ken kunv, er sioulder...  
 Disourr, didrouz...  
 Nemet du-hont war lez al lenn,  
 Lamm ur glesker en freskter an dour.  
 O, an eur-man, doueel,  
 Ma talc'h ar milc'hwid da ganan,  
 Endra ma hanval pep tra  
 Chom difinv en goursav,  
 O selaou en drantziz,  
 Hag o tialanat ur bedenn a frond.  
 A milc'hwid,  
 Da veulgan er serr-noz am laka da dridal,  
 Pa santan ennon evel ur vleunienn dianav o tigerin,  
 Ur vleunienn a vuhez, burzudus he douster.  
 O kan ! ...  
 En liorz va ene, stivell wenn va sonjoù  
 A respont d'az sonenn gant he moueziou sklintin,  
 Hag en dour va spered  
 E plij d'an holl stered en em velezouran.  
 Sed an eur espar ma stok an douar ouz an nenv,  
 Ma santer en anat  
 Ez eus Aeled o tremen diwelus war ho tro,  
 Hag o c'halon a levenez  
 O tont da bokat d'ho kalon-den.  
 O meuleudi c'hlan, barzoniez wirion,  
 Ar vouez-se o sevel en oabl,

Evit leunian an hollved kleuz,  
 Ha stekin hael betek dorjoù pell an nenv.  
 Kan, o Milc'hwid, hep span,  
 Rak ar Varzoniez a zo tra doueel,  
 Hag evurus an den en em lak evel dout  
 A-us d'ar vuhez danvezel,  
 Da deurel gant nerz eus don e galon vev  
 Un heson da eren an douar gant an nenv.

Selaou ez laouen :  
 War gribennoù meinek ar menezioù du-hont  
 E red un alan a beoc'h peurbadus.  
 War werc'hded an erc'hegi digenvez  
 E kan, mibin he zreid, an Awen vlim, o korollin.  
 O va c'halon, penaos tevel ha chom digomz :  
 'Vel d'al labous, geiz ha c'hwitell,  
 Setu da lod, gallout c'hoari gant son meizel,  
 Da sevel kensonadegoù marzus a lavar.  
 Setu livioù lies ar gomz  
 Da skeudennin dasneuziadoù ar bed hag an ene...  
 Klev da galon c'hren o senin en noz.  
 Penaos tevel ?  
 Evel ar sked hag an trid d'ar stered,  
 O barz, skiant an arz a zo dit-te  
 D'anavezout er bed al lavar bev,  
 Ha gouzout ober gant ar ger denel,  
 Da veulin gant trivli ger Doue.

Da c'her, Aotroù, eo da Grouadelez,  
 Ha n'eo ket ur ger maro, unan bev ez eo,  
 Gant flamm ha lamm, enkreuz ha levenez.  
 Klev, o Barz, pep tra ' vev,

Pep tra ' gan, a youc'h, a c'hoarz, a lenv,  
 Pep hini 'n e gevrin en deus 'vel un ene.  
 Pep unan 'zo un elienenn bennak  
 Eus ar vuhez he deus o c'hrouet holl.  
 Pep unan 'zo ur son eus unvaniez ar Ger meur  
 A reomp an hollved anezan.  
 Krouadelez, o ger Doue !  
 Kevrin ha ster, penaos da glevout,  
 Nemet o vont dit gant hon holl ene ;  
 Gant da galon, o den, klevout kalon Doue hag a  
 Ur c'han, ur frond, ur c'hemenn... [gomz...  
 Selaou, hag e tasseni endro  
 Da c'hallout displegan heklev da ene-te,  
 En lavar bev ar Varzoniez.  
 Ar skiant krin a laz buhez vlin ar vouldoù,  
 O zroc'han-didroc'han a ra  
 A bezioù, dindan taolioù he flancherez,  
 O rannan, disrannan, skejan, drailhan...  
 Né c'hell ken adsevel nemet korfoù maro.  
 Te avat, kae d'an hollved gant da spered a-bez,  
 Displeg an darempredoù meur, an ereoù diswel,  
 A stag an holl vouldoù kenetrezo,  
 Ha da ene gant pep tra.  
 Diston em reiz, heklev bagol,  
 Tregern em c'hreiz, o lavar bev,  
 Va laka tost ouz kalon ar bed.  
 Barzoniez c'hlan, komz c'hoaz ouzin.  
 Tra santel out, o va drantziz,  
 Rak te 'n hini hag a oar diskouez din  
 Dindan dremm ar boudoù, o c'hoari tremeniat  
 Skedoù flamm peurbadus daoulagad va Doue.

Ur splannder eo dija ar vuhez en danvez ;  
 Petra neuze buhez Doue ennan e-un ?  
 Kaout ur ger hon lakfe da danvan an didermen,  
 Ur ger a rofe dimp digerin dor an dianav !  
 O flemm dir hon hiraez ! Daoust hag ez eus un hent  
 En tu-hont d'an hollved evit mont d'an Hollvoud ?  
 Sed ar respont a drugarez d'hon truegez,  
 Gwir Verb Doue 'zo diskennet betek ennomp :  
 En eo ar ger a zigor dimp buhez an nenv.  
 Hag a-dal breman e c'hellomp lakaat da stekin  
 Hon tal a falsentez ouz e dal a lugern,  
 Hon selloù a lorgnez ouz mor divent e selloù,  
 Hon genoù a baourentez ouz e c'henoù a gan,  
 Hon c'halon yen ouz e galon a dan.  
 Klev ar c'hemenn, ar c'heloù mat,  
 A den hag a gantre er c'hask.  
 Rak an hini n'en deus ket evelse stoket  
 Betek ouz don ar Vuhez gant e galon vev,  
 N'anav ket c'hoaz levezet kuz ar Varzoniez.

A Krist !  
 Da vennigan a ran,  
 O vezan m'eo bet fellet dit  
 Goude kantvedoù-hir a breder reizel  
 Adkas adarre ez Iliz da Spered Sakr  
 Da c'hwezan en hor c'hreiz sonerez an anao.  
 C'hwezet en deus,  
 Hag a-nevez, dre holl, war dremm an douaroù,  
 O deus tregernet c'hoaz kanenn ha kanennoù.  
 An Awen hag he doa diagent  
 Entanet kalon an Diouganerion  
 Hag a oa bet livrin he mouez el lidazeulerez kentan,  
 Nemet ne veze ken klevet diouti

Nemet un hekleb bennak a gantved da gantved,  
He deus tridet adarre en hon touez,  
Ha tregernet en deus lid ar vouez, lid ar c'han.  
Ra vi benniget, a Krist,  
Dre maz eus bet savet er c'hantved-man  
Santualioù a veuleudi,  
Pennilizoù a lavar hag a son,  
Evit frealz ha diskuiz an eneoù.  
Ar c'hantvedoù tremen o deus anavezet  
Savadurioù bras ar meizerez hag ar preder kristen  
Ha barzoniez tonius ar mein kizellet.  
Ni 'zo galvet da lid ar ger, da gan ar Verb :  
En santual ar gomz, da veulin a raimp,  
Da veulin, da veulin...

A, peseurt kan a zeskez d'in hiziv,  
Awen, merc'h Doue !  
Penaos herzel ouzit, o pried va ene ?  
Lamm va c'halon a respont d'az lammoù.  
Rak ar c'horoll mibin hag a zegasez din  
Ac'h eus desket 'vidon gant gwerc'hezed an nenv.  
Penaos herzel, penaos derc'hel ouz ar galv,  
A daol ouzin da zaoulagad glaz,  
Dourel evel ar mor, aerel evel an nenv,  
Da zaoulagad skeltr ha laouen,  
'Vel richan ur waz-dour en pradeier miz mae,  
Da zaoulagad sart ha bliou,  
Enno stered o lugernin,  
Evel gouleier sakr ar santualioù.

EIL LUSKAD

## AR VERB A LEUNDER

Sioul ha meurdeus



O Milc'hwid,  
Ar bed a selaou, ar bed a-bez,  
Da vouez o sevel en noz digoumoul  
Hag en aer boull o tassenin.  
Ar bed a selaou, ar bed a-bez,  
En eur-man, m'eman da ganenn,  
Freskter da yaouankiz,  
O 'n em donian gant douster an noz  
Ha drantziz peurbadus ar ster.

Du-hont war lein ar run,  
Dindan skeud ar pin o hunin,  
Ur chapelig en kevrin he c'halon,  
'Zo difinv en he hoal o pedin.  
Deut eo pep tra da vezan treuzwelus  
Ma c'hellomp lenn en marz o diabarz.  
Eman pep boud o vleunian hag o tigerin  
Da strewin ur frond treantus a beoc'h.  
Ha bezans Doue a seblant dont da vezan merzus  
Ma c'hellomp stekin ouz e splannder divent.

O, petra 'ganez ?  
Ar santelez a vez o frondin  
Eus edon ar Grouadelez,  
Hag al levenez o perlezennin en kalir pep boud,  
D'hon ene da vont evel ar gwenan  
D'he sunata da vevan diouti.

O, pet bleunienn er bed o tarzan en eur-man,  
Evel steredennoù a vuhez,  
Diniver, diniver.  
Maeziadoù perlez ec'hon  
En solioù-hont an nenv,  
En strad ar morioù pell,  
En ledanderioù va spered den.  
Ha bleunioù em ene o tarzan didermen  
Hag o kanan pep hini gant he son...  
O c'hwi, bleunioù va c'halon,  
Bleun prunus, ken tener, ken fresk, ken skanv,  
Evel lammoù bugale o c'hoari,  
Betek ennoc'h, bleunioù kaktus, ken sebezus,  
Gant ho toare amjestr ha trec'hlied.  
O pet a vleunv...

Met, e kreiz ar misi,  
Perak e teu da vouez, o milc'hwid,  
Da vezan 'vel doaniet gant an nec'h,  
Ha da gan hiraezusoc'h  
Eget gouelvan ar gouelini war an aodoù.  
Hen gouzout a rez,  
You ha yud a son er bed a bep eil.  
E-pad m'eman ar ster o korollin lirin,  
E labour en kalon an derv,  
Ar prenv gant e weltre,  
Ar boan en kalon ar c'hlanvour,  
Hag an naer o trellan ar ran  
A lonk anezi en bev.  
Pez a ganez eo ar Grouadelez,  
Gant he c'hemmesk a lugern hag a falloni,  
Ar Grouadelez gant he stourm  
A vadelez hag a zrougoni...



Ur milhendall dirouestlus eo,  
Nemet 'teufe unan bennak d'hon digilhan.  
A, daoust hag e ve ur ger-alc'hwez d'hor c'harc'har?

Digor erfin, dor morailhet war Vab-den,  
P'eman-en o louedin dindan skeud an Ankoù.  
Hogen piv a zougo war e skoaz  
Alc'hwez dir hor frankiz ?  
N'eo ket unan a ve ganet 'n ur palez aour :  
Nann ! En kraou al loened eman gourvezet  
Hag ar Vajed eus a-bell o deus gwelet e lein an nenv  
Ar c'heloù mat, ar c'heloù drant d'o c'halonoù ;  
Ar Vajed fur gant roadoù  
D'e azeulin a zo deut di ;  
Ha kerzed gwevn o c'hanvaled  
En deus gwagennet war gern ar menezioù.  
Stou va c'halon ouz treid ar Roue meur,  
Verb Doue eo, an diskoulm da bep tra,  
Rak en abeg dezan ez int bet krouet holl.  
O Barz, doug ez taouarn, road ar bed a-bez,  
En ur c'hinnig a Varzoniez,  
'Vel ma reas an tri Maj, ergentaou.

O Krist, setu da gentan holl an aour ruz, roueel,  
Melezour pep sklaerder nenvel ha douarel.  
An heol war roudoù an oabl, al loar,  
Kor ar stered war grommel an noz,  
Pep kaerder, pep tenzor,  
Dirazout gantan 'zo digor.  
Sed an arouez da gement 'zo pinvidigez,  
Liesliv plunv ar paün,  
Mordan nozioù burzudus ar mor,

Dans ruz ha nerzus ar flamm,  
Pailhuroù sklerijenn o c'hoari war an dour,  
Kement se a zo aour.  
Kement se 'zo kened da viken o trec'hin.  
Youc'hadegoù divent ar vuhez o vleunvin  
En splannder yaouankiz beure un nevez-hanv ;  
Youc'hadegoù divent an Aeled en nenvoù,  
Ha ne glevas diouto en nozvez Nedeleg,  
Ar Vesaerion, nemet un heklev damvouget anezo.  
Ha setu ar c'han-kerz evit lid an trec'hour,  
Ar ganenn o virvin burzudus he c'henson.  
Setu traez melegan an aodoù didermen,  
Ez eus bet lavaret diwar o fenn  
E ve mibion Abram ken niverus hag int.  
O trevadoù fonnus rouantelez Doue  
'Vo dastumet o greun e solieroù an nenv.  
O pobl divent an dibabidi,  
Engroez an eneoù a zoug enno tan ha lugern  
Hag a vez o skedin en noz du ar pec'hed  
'Vel stered bev, dibulluc'hus, dibulluc'hus.

Degemer en eur-man, gwir Doue an neved,  
Ene skanv an ezans a brofomp dit da eil kinnig.  
An aour a zo gourel, an aour 'zo trec'hidel,  
Ennan galloud al livioù ruz.  
An ezans eo kement a zo gwregel er bed :  
Linenn-son ur fleüt, o tassenin e kreiz ur c'hoad,  
Bleunioù gwenn al loa-zour war velehour ul lenn.  
An traoniennoù soubet en brumenn glas ar beureoù,  
Ar gliz o teneraat an holl livioù.  
Dasskedoù burzudus tenzorioù dianav :  
Perlez an istr en kuziadell ar mor divent,  
Ar mein-opal en sekred an douar,

Hag ar preder em c'halon digenvez.  
 An ezans eo ene kuz an dra,  
 O 'n em zialanat da zistrein da Zoue,  
 Ar vuhez bevezet didrouz ha dianav,  
 Evel ar vleunienn-se en skeud va c'hamb  
 Oc'h ofisan evidomp-me va-un hag an Aeled.  
 Kaerderioù al labour sioul en kloastr an ti,  
 Kaerderioù ar moged a sav a-us d'an toennoù  
 Eus pep oaled, hag ar wreg oc'h aozan d'he zud da  
 Bubez kuz Nazaret eo mister an ezans, [zebrin.  
 Mister ar wreg, mister an ti.  
 Sed an emro ha mezventez ar garantez  
 Evel ar frond a briz a skuilho Madalen  
 War dreid Jezuz,  
 Hag a leunio gant e c'hwez-vat an ti a-bez,  
 Hon ti dimp, kristenion,  
 Hag a zo an hollved, neved Doue hag hon Iliz.  
 O kevrin an heson !  
 Pa sav eus an aoter en eur ar veuleudi  
 Gant luskadoù bagol al lestr ezans,  
 Al lidkanenn diwar diweuz ar Werc'hez Ver  
 Ez eo azaouez c'hlan galloudeziou gwregel ar bed,  
 En troiadoù ar frond glizin.

Met perak, o Mabig, ne brizez ket hon roadoù ?  
 A vec'h eo ma kredomp kinnig dit an trede.  
 Goude ar sked, goude ar frond,  
 En endon ar c'hased, sed an donezon kuz,  
 An dilufrann hag ar c'hwervan...  
 O burzud ! Warnan eo e serrez da zornig.  
 Roue, ne brizez ket hon aour, rak paour e vi ;  
 Doue, ne lezi ket an dud d'az azeulin,  
 E keit ha na 'z po ket pignet war bost ar groaz

Ha gonezet an trec'h dre anken hag anoaz.  
 Pinvidigez hag aour a gavi pa gari  
 Ez klodoù peurbadel...  
 Met ar mir a viri 'vit da gerz douarel,  
 Ar mir 'vo da lod er bed-man,  
 Bet' an eur diwezan, war dorgenn ar c'halvar,  
 En eur da wask,  
 Pa danvai 'nezan, en ur pok c'hwerv-garo,  
 En eur da briedelez noaz gant ar maro.  
 Hag ennan 'vi soubet gant al louzeier-c'hwez  
 En donderioù ar bez, o c'hortoz da zasorc'h...  
 Setu perak pa ziskennez breman e kloz da liorzou  
 E plij dit-te kutuilh bokedoù mir frondus  
 E kloz hor c'halonoù.

Nemet piv a gompren priz da c'hwervder, o Mir !  
 N'houlomp ket eus taerder da c'hwez  
 Hag eus da emziouer e tistroomp hon dremm.  
 Ha te koulskoude an hini a bura hag a vir  
 Te an hini a vrasa hon nerz,  
 Te, an hent meur d'an trec'h kadarn.

Em liorz kuz, tro d'ar stivell,  
 Am eus plantet ar bodoù c'hwerv,  
 Tro d'am stivell, en kurunenn.  
 Hag ar bleunioù a zialan  
 O ene skanv hag hiraezus  
 Ma teu va c'hariad d'o c'hutuilh.  
 Hag ar skourroù diwar o gloaz,  
 A zourenna daeroù frondus  
 'Zo mein topazo lugernus,  
 Er gurunenn, tro d'ar stivell.

Hag an dour-strink, en ul lamm bev,  
A sav bagol betek an nenv,  
Evel da gan, o Milc'hwid,  
O tougen en e sked arc'hantek  
Kinnig ar bed a-bez.  
O, pep tra 'zo leun a gened,  
Pep tra 'zo da, pep tra 'zo kaer,  
Evit an hini her c'hompren.  
O, klev...  
Hiboud an dour a respont tener da sarac'h an defioù.  
Gwel...  
Ar c'houmoul en nenvou a neunv evel bigi er mor.  
Ha ret mat an dison 'vit ma splanno ar gensoniez,  
Ret ar poanioù 'vit dasorc'h an ene,  
Ha ret an tantad ruz e fin ar bed  
Da vijelez d'an deiz peurbad.

TREDE LUSKAD

## AR VERB A GEVRIN

Damnec'hus ha goulennus



**B**ARZONIEZ, Barzoniez, a lavaromp-ni !  
 Mar befe da gan-te,  
 Dilu ha sklaer-dour-feunteun  
 Evel hini ar Milc'hwid-man,  
 E vefe dimp mioarvat un dudi da selaou.  
 Henez da vihanan a c'hellomp intent e lavar,  
 Ni, tud ar werin, 'zo digevrin en o sonjoù.  
 Met piv a gompreno da gomzoù-te ?  
 A Mab, n'eo ket gwall-dreut da lorc'haj-te  
 Pa gredez lakaat da ganenn  
 E skoaz gant hini al labousig espar !

— Ya, setu pell 'zo e lavarit se din.  
 Met, mat eo,  
 Pa n'hellan ket kanan hervez ho plijadur.  
 Pez am eus d'ober  
 Eo bezan leal ganin ha gant ar bed,  
 Ha lavarout ar wirionez ;  
 Rak n'eo ket me a c'hoari kuz :  
 Pep tra er bed a zo kevrin, a zo disgwel.

Gwaz a se mar ne gomprenit mann.  
 Ne glaskan ket dre blijadur ho lakaat da follin.  
 Met penaos e c'hellfen diskulian ar c'hevrin  
 Keneve ar gerioù 'zo kevrinus  
 Ha kenson gant endon ar boud.  
 Taero nep a garo !  
 Perak ne rafen ket gant ur ger  
 En abeg ma ve divoaz ha dianav  
 Mar kavan-me gantan esmae, achantouriez ?

O tudoù, piv a zibrenno deoc'h adarre  
 Dor prizius ar c'hlevoud burzudus,  
 Ma c'hellfot c'hoaz selaou an heklevioù heson  
 O 'n em respont a bell,  
 Henvel ha dishenvel kenetrezo.  
 Piv a zibrenno deoc'h dor al liorz espar,  
 Gant he bleunioù souezus, frond an estlamm enno.

A pegen gwir eo ar pez am eus lavaret a viskoaz :  
 Evit deskin ar Varzoniez d'ar vugale,  
 N'eus 'met un tu : o lakaat da zibunan divinadelloù ;  
 Rak araok gellout lenn divinadell ar bed  
 E ranker 'n em voazian'ouz mibiliezoù  
 Ha n'int ket hepken mibiliezoù.

Evurus an hini a zo pep tra aes evitan  
 An hini n'anav ket enkrezioù an enklask  
 Na gwaskerez ar goulenn en e spered,  
 Evel pa vije ar bed un dra ken aes e zibunan,  
 Evel pa vije an den un dra eeun ha didro-kaer  
 Ha ken aes-se da zisklerian ;

'Vel pa ne vije ket kement den ur c'hevrin,  
En e zremm ur c'hevrin,  
En e galon ur c'hevrin,  
Pep den hag a vale gant samm e donkadur.

A Milc'hwid, ar sonenn hebleg a laoskez en noz,  
Evurus an hini ne wel enni nemet sklaerder.  
Hogen en a-drenv, o tont a-dreuzoù,  
Tro war dro dit, a bep tu,  
Setu ma klevan mouezioù ha mouezioù,  
Mouezioù lirzin, mouezioù garo.  
Mouezioù briz an Tigred o viaoul gant krizded,  
C'hwiban lemm an naered o vonet da flemman,  
A Milc'hwid, holl chivousted ar bed a sav a-enep dit,  
Met ivez ez richan eo pep richan hag a drivli,  
Troellennoù marzus ar c'hregin-mor,  
Fronde treantus ar c'hoad santal o vogedin,  
Lammoù lemm antiloped ar gouelec'h...  
Ha kement barz, glan e ene,  
En deus taolet e skrij davet an nenv, a galon,  
A zo da son, en noz kleuz, un dason dezan.  
Kan, o te hag a zo splannder en hinon an aer,  
Rak da sonenn voull a zo respont da vil sonenn  
Ha da lavar a levenez [voull,  
A zo hekleb da vil lavar a levenez.  
Sav, Awen, sav eta ;  
Ar Varzoniez eo se :  
Klevout hag heklebout,  
Selaou ha daskanan.  
Sav,  
Perak e kendalc'hez da gomz ouzin eus kevrinoù,  
Oc'h atizan ennon va c'hoantadenn  
Tra ma chomez aze gant un damc'hoarz ez muzelloù,

Hep sevel d'am blenian war hent ar marzerez.  
Hiraez am eus d'ar wezeg vras  
Davit ar feunteun a vuhez,  
Ar birvilh en douster he dour.  
Ar c'hoant am broud da vont  
War roud an harozed kent,  
Uhel a galon, war hent ar Graal Santel.  
O, peseurt bourevierez bagol  
A ro d'am ene deol evel eskell.  
Peseurt galvadenn laouen  
Am strobinnell gant he breoù ?  
Galvadenn va gouenn ez eo  
Hag a' hoal va c'halon goude kement a Imramoù.

O buhez, hen gonezet am eus,  
Ar C'halir, splann ha lirzin ;  
Ennan am eus evet al levenez a gopadoù.  
Al levenez...  
Ha drant e oa va c'halon, ken drev,  
Ma 'm eus kroget da zansal, o kanan,  
War an ton iskisan, komzoù dianavez.  
Em divrec'h e tougen telenn arc'hant Varzin,  
Ha pa zihune ar mintin,  
Ez aen dre pradeier-ha koadeier,  
O teurel d'ar avel va son.  
Pa dremenenn e vousc'hoarze an dud ouz va gwelout,  
Met din-me ne oa forz ragachoù gak o goaperez.

O Verb, nann, ne 'm eus ket kemeret da 'z meulin  
Ur viriltonenn pemp gwenneg.  
Ne 'm ket klasket trompilhan pompus  
Na safarin e krejz ar foarlac'h

Da vamin en dro din ar c'henaoueion.  
Klasket am eus da gened dibar  
'Vit da zoujan ez wirion.  
Hag en kalon an nozioù glan  
Em eus kanet ez nevedoù  
Gant tinterez ar c'herdin sakr.  
Da ganet am eus, da gomprenet, da garet,  
A sklerijenn ha diskuliadur  
Alc'hwez aour da zorioù ar burzud  
Ha kevrin distrad evelato.  
A Verb, hag a zo bet aozet ar bedoù ez ano,  
Ro din-me spurmantin da zonder diamen,  
Ha war va diweùz livrin ez hinono ur sonenn sklin-  
Un heklev da gengan peurbadus an Aeled. [tin,  
Diziwez, diziwez, o Milc'hwid !  
Er c'halir a vuhez ne 'm eus ken c'hoant  
Nemet evan levez, levez ur c'han dibaouez.  
O Barz an noz, sed ar c'hemenn :  
Ar Varzoniez 'zo didermen !

PEVARE LUSKAD

## AR VERB A DREC'H

Krenv ha trec'hus



**D**ALC'H, ha dalc'h, ha dalc'h,  
Na dav ken, na dav ken,  
Ha lez an noz da drein hag an deiz,  
Ha deizioù war zeizioù, ha nozioù war nozioù,  
Met kendalc'h gant da gan, dizehan, didermen.

Ha pa zeufe korriganed al lanneier da vervel holl,  
Hag an holl vleunioù da wenvin,  
Hag an douar e kanv da vezan trist ha du,  
Ha pep kaerder e ludu,  
O, kendalc'h gant da son,  
Hag e vi trec'h war an tousmac'h,  
Hag ez kan e skiltro embannoù an dasorc'h...

Noz eo, hag eman an droug war vale,  
Mevelion an Ankoù 'n em sil o risignal  
Hag a dag a daol trumm un ene war enaou.  
War al lanneg du-hont ez eus sabad gant ar bou-  
Hag e klevet a-bell c'hoarz o begeliezer. [c'hed,  
Ha petra 'vern !  
Nemet kaeroc'h a se 'vo da vouez heson,  
Nemet bevoc'h, nemet skiltroc'h  
Da c'hervel davedout ar re a venn dremm ar Gened.  
Evelse 'man ar bed, enebiez a bep tu :  
Ar prenv a-enep ar prenv,

Krog ar gozni a-enep sav ar yaouankiz.  
Emgann a bep tu, emgann ennout, setu ;  
Ar stourm eo kentel an douar.  
Hag ar stourm 'zo e pep tra ;  
Mad ha fall 'zo mesk ha mesk :  
An drouk-c'hoant er galon e-kichen karantez,  
Kebell-touseg ar maro e-touez ar re saourus.  
Dit ta zibab,  
Nemet diwall,  
Rak spesoù an Ankoù o deus neuz ar Vuhez,  
Hag ar Vuhez 'n em guz awalc'h dindan druilhioù.  
Gant petra ez ?  
Sell ha selaou,  
Ha klask da hent en entremar...  
Meiz ac'h eus da zilenn.  
Kae 'ta, ha kerz, ha klask...  
Doanuis an nec'hamant, nemet brasoc'h ivez trid  
[ar c'havout.

Klasket am eus, kavet am eus :  
Hent ar Vuhez 'm eus embreget.  
Pez am eus dibabet eo an holl vad, an holl gened.  
Dibabet am eus stourm, dibabet 'm eus trec'hin.  
Evnig an noz ! Da gan a zo breman va c'han.  
Ganit, me a fell din rein ur vouez  
Da gement a zo kaer, da gement 'zo splannder.  
Buhez, te a zo din,  
Met n'eo ket evit da danvan gant va c'horf,  
Kement 'zo korf a serr hag a strisa,  
Ar c'horf a zo karc'har,  
Met ar Spered a zo frankiz.  
Kevrin hollvedel ha kened,  
Ho piaouan a rin gant nij krenv va spered

A-zreist amzer hag ec'honder.  
Sko da eskell en aer, va spered taer,  
Kemer da vad lec'h m'hen kavez  
Rak n'eus den hag a c'hellfe herzel ouzit  
A biaouan pezh a garez.

O sav, va spered dieub !  
Ar bed holl a zo dit,  
Ha muioc'h eget ar bed holl  
Bezans da Zoue ez kreiz don.  
Ha pa vefe rasket breman diganit da zanvez,  
Petra se dit, pinvidik out :  
Tenzor ha tenzoriou a zougez ez ene  
Ha n'hello den na tra o diskrapan nag o laerez.  
Adsav, va spered dieub !  
Rak da Zoue 'n deus roet dit da berc'hennan  
E binvidigez-en divent ha didermen.  
Da Zoue da 'n deus roet dit e frankiz-en,  
Da dridal dishual en astenn da ene.

Va dieubet ac'h eus diouz ar fals-doueou  
'Vez azeulet er skolioù-meur,  
Gant ezans put ur c'hlaennerez diziwez ;  
Anavezet am eus arc'hveleion ar naer-gobra,  
Ha va dieubet ac'h eus diouto ;  
Diouz an dud bepred o vamin  
Dirak kement bramm speredel a vez laosket er bed  
Gant ma vo komzoù flour awalc'h d'e c'holein ;  
Diouz ar re-se o deus kavet e oa ar varzoniez  
Begeliat diwar benn o rud ;  
Va dieubet ac'h eus diouto.

Ha breman ra zeuint chivous,  
D'am dantan mar karont,  
Petra 'vern,  
N'hellint ket tizout va spered  
E nij laouen e frankiz.  
Ha petra 'vern mar deufent arc'hoaz d'az lazan,  
Gant ar bobl-loukez o yudal ouzit,  
Hag o tansal en dro dit ur c'horoll-lu.  
Gant son groilhet tamtam o gevierez.  
Petra 'vern, mar dalc'hez a-enep, gant da youl di-  
[drec'hus,  
Gant da galon divrall 'vel ur peulvan er barr-avel.

A Krist !  
Te an Hini en deus trec'het  
War holl fallagriez ha chivousted an dud,  
Ha pa seblantes koll  
E c'honezes gant nerz da youl ha da galon.  
Rak difennet ac'h eus testeni reiz an Tad,  
O vonet dizaon betek barr an aberz.  
Trec'het ac'h eus.  
Krenvoc'h eget biskoaz out dasorc'het e mintin Pask  
Tra ma tanse ar steredi en oabl.  
Neuze kement buhez, kement kaerder er bed  
O deus laosket ur youc'hadeg divent.  
Hogen mez ruz da Gaifaz, mez gant bagad pilpous  
Pa gredient e oa paket da vat [e genseurted,  
An diouganer dindan o sielloù.  
Mez ruz-tan d'an diaouled lostek  
O tec'hout da guzan en o izelvedoù.

Breman, a Krist, te an Hini 'zo peurgened ar bed.  
Azeul dit-te digant splannder ar boud.  
Rak ar Gened eo trec'h an urz e-kreiz an enebiez,  
Trec'h ar c'henson e-kreiz an disoniez.  
Te, ar Roue, Te ar c'hevre, Te al lugern.

Tremenet eo arvar an Noz,  
Levenez Pask a darz en un adsav ramzel,  
Hag e tregern  
Trompilhadez velen ar foen sart er pradeier.  
Ur bountad a vuhez a sav er parkeier,  
A lak ar bronsoù da strakal,  
A bar e livioù gwenn ar bleunioù fresk,  
E bleunv ar brunusenn, e bleunv an avalenn,  
Blim ha livrin oc'h hinonin.  
O klec'hier, en aer flour,  
Korollit en lidel 'n ho luskell beureel ;  
Kanit, rak ar Vuhez 'zo diflipet eus dalc'h ar bez ;  
Dasorc'h va C'hrist en em zispak 'n e gorf eskuit,  
Kentan bleunienn un nevez hanv na varvo ken.  
Ha ken c'hoant ne 'm eus ken, o Salver,  
Nemet stourm eveldout,  
Hag eveldout bleunian en nenvoù da viken,  
Ober eus va buhez un hent kadarn d'ar sklerijenn,  
Ha krèdin e c'honzere ganit  
Hag er bed all hag er bed man.  
A, hen kredin 'ran, met krenva va c'hredenn.  
Aotrou, ro dimp ar feiz,  
Hag e vimp trec'h 'dal ar bed-man ;  
Ro dimp ar feiz ennout,  
Hag hor bezo ar feiz ennomp.

Ro dimp ar feiz, ra gredimp en hor gwir,  
Ni holl da vihanan hag e venn a galon  
Adsav hor bro vezekaet,  
Adsked hor yez taget ha mevelaet.

Dasorc'h, dasorc'h !  
Deus, o Spered 'vit hol luskan,  
Tre an Hini hag a labour er c'halonoù.  
Bouilh ar vammenn er feunteunioù,  
Kri ar skrilhed el lanneier,  
Lamm ar gwiber e beg ar gwez,  
Ha bount ar bleunioù blim,  
Kement-se holl 'zo da c'hoari,  
O Spered sakr,  
Te hag a zo da blijadur  
Lakaat da ziflukan eus hon endon  
Strinkadoù a vuhez,  
Luskadoù a zrantiz,  
Da sevel galloudek betek en lein an nenv.  
Evurus an hini az kar a-greiz kalon :  
Ur stivell beurbadel a gan en e ene.  
O, deus,  
Galloud ha tan,  
Sklerijenn ha splannder,  
Emastenn ha trivli,  
O, deus, da nevesaat doare ar bed,  
Da skarzan diwarnomp  
Breinadur ar goanv ha noz du an dispi.

A, kredin mat a raent e oa maro an Hini goz.  
E-pad keit all o doa gedet he zremenvan,



Ha kement o doa bet c'hoant kement gwech d'he  
Erfin e oa maro, ha maro mat, [zagan.  
An hini goz, a oa ken tenn ober ganti,  
An hini o lakae da grenan dirazi.  
Breman, da vat, e oa maro,  
Ha ne oa ken d'ober  
Nemet skuilhan pilpous  
Un daeraouenn bennak dirak he zud,  
Ha lakaat da sevel ur maen bras war he c'horf,  
'Vit d'an holl gouzout kaer e oa tremenet mik...  
Met, petra 'zo, mil gwrac'h an diaoul,  
Eman-hi war he bez, adarre,  
Hi yaouank, hi bagol,  
O pilat gant he zreid, en ur c'horoll kadarn,  
He maskl a goziadez hag he gwiskamant teuc'h...

Deut out, o Spered Glan,  
Ha yaouankaet eo dremm ar bed.  
Digorit, o bronsoù,  
Brallit, klec'hier arem,  
Tregernit trompilhoù,  
Setu m'eo Pask ar Vro.  
O youc'h, o tan !  
Gant bangor an Aeled,  
E tassion dre ar bed kanennoù peurbadel,  
Rak setu er beure, yaouankiz ha drantiz,  
Levenez a nevez,  
Levenez wenn ha sklerijenn.  
Amen.

**SONENNOU  
BERR**

## SKEUDENN WAR DEC'H

Edon o vale war an hent  
Pa dremenas e-biou din, o redek  
Ur plac'hig vihan...  
Ken souezus en he dremm  
He daoulagad alamandez-henvel !  
Ha mibin e pignas gant ar c'hrav  
Ma kleven o pellaat strap-distrap he boutoù.  
Ha gant un hej a goulzadoù,  
E tistaole war he choug  
He blevad hir ha gwagennek,  
An ebeulez !

## KAN-GOANV AN DRIDI WAR LINENN ORJAL AR PELLGOMZ

War an hent bras, ne dremen den...  
Nemedomp, gant hor mouez unton,  
O kanan trist d'ar yenijenn.

Hor geiz hiraezus a zasson  
En brumenn didrouz ar maezioù  
Gant ur skeltred dous hag eston.

Peseurt planedenn hon hini !  
Ar glav, ar skorn, an avelioù  
Evit luskan hor melkoni.

1944.

## LAGADOU

Al lagadoù a zo morioù  
Morioù divent gant kevrinoù.

Morioù ken kunv en o mordo  
Pa dro an houl plegioù o son.

Met a daol trumm, luc'hedenn dir,  
Strafuih, ha bouilh, ha droug-avel.

Peseurt pesked a vev enno ?  
Morc'histi yen, morvleizi ruz,  
Pe pesked nij holl-arc'hantek ?

Peseurt bigi a riskl warno ?  
Listri goueliet 'vit ar c'hantren,  
Pe listri lous ar c'henwerz du ?

Peseurt hunvre 'ro tan dezo ?  
Skleurioù gadal tavarn ar porz,  
Pe hoalerez an inizi ?

O lagadoù, moriou distrad,  
Ha ken divent ha speredoù !

### DA LAKAAT OUZ TRAON AR « WERC'HEZ ER C'HRAOU » GANT MEMLING

An Hini 'azeulez, pedennerez,  
Gant da zaoulagad kloz  
Ha da zaouarn digor ha damsavet,  
Hag-en eo ar bugel ac'h eus ganet  
Hag astennet en pleg da vantell hir,  
Pe ar C'hrist kevrinel a gendalc'h d'az leunian ?

## AN EUR-SE 'ZO KEN TOST D'AR PEURBAD..

Ar c'havaned 'zo aet pell 'zo da gousket en tour,  
Hag an heol splann 'zo aet pell 'zo en tu hont d'ar bed,  
Mouget eo sklerijenn an deiz...

Nemet em c'hamb, ur goulou war enaou a vev,  
Em spered, ur goulou,  
E don va ene, ur goulou war enaou a vev.  
O sklaerder diabarz, te, ken tost d'ar peurbad !

Ermaez eo ar goanv : dibourc'h ar gwez, revet ar bleunv;  
Ar vougasenn fenez a ren gant he dalc'h spontus.  
Nemet em c'hamb war va burev,  
Em eus ur flammell (1) ruz en he bleunioù,  
Hag em c'halon ivez ur flammell ruz en he bleunioù,  
Em ene kuz, ur flammell ruz en he bleunioù.  
O buhez er c'hevrin, te, ken tost d'ar peurbad !

O peoc'h ! N'eus ken nep trouz.  
Tamolodet eo ar bed en e gousk,  
An evned-kaz zoken ne c'harmint ket fenez.  
Hag em c'hamb, n'eus ken trouz,  
Em spered, n'eus ken trouz.  
Stêr vras va sonjoù-den a hanval chom digas,  
Didrouz...  
Nemet e don va ene kuz e klevan ur mouskan,  
Ur vouez sklintin,  
Mouez ur stivell, o va fedenn !  
O son ar vuhez-se, son ken tost d'ar peurbad !

(1) Flammell : cyclamen.



## ANTIFONENNOU

### I

Goanv. Skorn war ar bed.  
Yen an amzer ha yen an dud.  
O pegen dous en em sonjal  
Dirak un tan o flamminan,  
An tan ennout, o va ene,  
Evel un heol, bezans Doue !

### II

N'ouzon ken petra lavarout dit :  
Skanvaet e santan va spered  
Pa'm eus skarzet dioutan e c'hoantaennoù gouez.  
Hag e karfen nijal..  
Met pep kammed hag am distagfe diouz ar pri  
'Ro din emskiant kriz eus bec'h va fouez-natur.  
Ha koulskoude,  
Skarzet diouzin va c'hoantaennoù gouez,  
Eo leun va c'hreiz gant da c'hoant-te.  
Leun gant ur galv,  
Leun gant ur c'harm...  
Ha te o pokat din en edon va ene...  
Pegoulz 'n em ziskouezi d'am gwel ?

A va c'halon, pebez kan 'vo ennout en deiz-se !

### III

Ya, gouzout a ran,  
Da blijadur eo c'hoari ganimp,  
Evel ur vamm gant he bugel  
O c'hoari toull-kuz gantan,  
Hag hi o vont da souchan,  
Ha d'e c'hervel  
Da c'houzout hag en he c'havo diouz he mouez.  
Ha pa 'n em adkavont a daol-trumm,  
A neuze !  
Pegen laouen ar c'hoarz.  
Pebez drantiz d'ar vamm goude ar c'hask,  
Sevel he bugel 'n he divrec'h  
Ha pokat hir outan.

## TE, O SALVER...

Te, o Salver, roue, spered,  
Esper, pried, ha steredenn,  
Nevez-amzer, bleunienn, kened,  
Kalon, sklaereded, ren va fedenn,  
Krist, va Doue, Verb emzenet.

Haroz, tiern, tan lugerner,  
Leon, trec'her, sonj oberiant,  
Diamant, ezans, ha mestr-kaner,  
Deus, o buhez ! deus, ha bezant  
Em ene drant, ro din-me splannder.

## HAG E WELIS...

Hag e welis...  
Petra 'ta 'weljout-te ?  
Un den 'n e sav war gribell ar menez,  
Hag en, divent en e veurdez,  
E dreid a-stok ouz mur Sion,  
E benn en oabl 'kreiz an hinon.  
Hag e youc'he : « Me an Hini a zo kened,  
War an Ankoù am eus trec'het ».  
Hag en oabl e kane ur ganenn diglevet,  
E vouez a c'hoarie war ur skeuliad nevez,  
Ha me 'chome bamet em azaouez.  
Met an dud en dro din  
Ne glevent mann, ne welent tra...  
« Perak, emezon-me, n'az klevont ket, o va zre-  
— N'int ket kenson, o prederour » [c'hour ?

## DONEDIGEZ

Adal deizioù deroù ar bed,  
Ha ne glevez ket ?  
War deuziadurioù disneuz an danvez,  
War droellennoù kamm ar sterenoù kentan,  
A viskoaz e teu, a viskoaz e teu.

Gant pep oadvez, gant pep mare,  
Pep koulzad, pep momed,  
War gern dinamm ar menezioù erc'hek,  
Pe 'mesk an dud o paotaat er straedoù lous,  
Bepred e teu, bepred e teu.

Tremenet eo, o lezel tres e dreid  
Enlouc'het en pri hon hentoù,  
Hag engroezioù an dud a heulie son e vouez.  
Tremenet eo,  
Met bepred e teu, bepred e teu.

Zoken, goude dezan  
Klozan dorioù an droug hag ar c'hondon,  
Ha monet adarre d'azezan en e glod,  
Galloud an urz divrall en e zaouarn,  
Da viken e teuo, da viken e teuo.

Rak mister e azvent n'en devo ket diwez,  
N'hall ket kosaat.  
Goude kreskin betek ar barr,  
Emzonzon Doue 'chomo bepred ken nevez all,  
Da viken e teuo, da viken e teuo.

## GANT PESEURT GER...

Gant peseurt ger az kanin-te,  
Nemet gant an hini ac'h eus-te distaget :  
Kan da ziweuz eo levez ar vuhez er bed,  
Koroll ar bleunv gant frond an eurioù kemmesket.

Met ar bed lies-se, penaos hel lavarout dit  
En ur ger hepken,  
Ur ger hepken a gened splann hag a leunder.  
A va ene, meleour da gement tra 'zo,  
Ennout-te da unan, kinnig an hollvedoù  
Gant da embrof unan hag anterin,  
Kanaouenn veureel o frondin en sioulder.

Siwaz ! Ennon ne welan ken 'met gaouierez,  
Ha diwirion eo va lavar.  
A va Doue, n'eus er bed holl nemet ur ger  
A unvaniez hag a leunder,  
An hini a gan en kalon da Verb enkorfet.  
N'eus nemetan hag a vefe  
An emroad a garantez  
O tigerin leun hag unan ;  
N'eus nemetan hag a vefe  
Ar vuhez o trec'hin war disoniezoù ar pec'hed ;  
Nemetan ar gensoniez veur  
Ac'h eus krouet 'viti liesvouez ar boudoù.

Rak setu kement tra en dalc'h trec'hus da Grist,  
En e zalc'h, leunder ar pobloù dasprenet.  
Da Vab, da Vab unik, eo ar ger unanel  
A fell din breman da veulin gantan.  
O Tad, setu da Verb,  
Ma 'z karin-te  
Gant ar Ger e-unan ac'h eus-te distaget.

